

Piv eo an dud a ziviz legadiñ (pe get) ar yezh

Katell Chantreau zo anavezet evit he labour en Ubapar (ha kalz a draoù all e gwirionez !). Emañ-hi gant ur raktres tezenn doktorelezh diwar-benn treuzkas ar brezhoneg. Dre ur c'houlennaoueg enlinenn, pazenn gentañ he enklask, e fell dezhi daspugn 400 respont gant tadoù ha mammoù ganet etre 1970 ha 1995, brezhonegerien anezhe p'eo bet ganet o bugel kentañ, evit gouzout piv eo an dud-se, peseurt implij o deus eus ar brezhoneg, peseurt dibaboù yezh a reont gant o bugale, ha peseurt implij eus ar brezhoneg o deus o bugale.



Boued-spered he deus kavet Katell Chantreau el levr *J'élève mon enfant en breton* gant Mikael Madeg (Emgleo Breiz).

Dibab legadiñ pe get ar brezhoneg er familhoù e oa danvez da vemor Master. Ral eo ar studiadennoù war se. Petra en deus roet c'hoant dit da gregiñ ganti ha da vont en tu all d'ar Master ?

Ar skiant bet prenet ganin evel mamm hag evel buhezouez he deus roet c'hoant din da gompren gwelloc'h eus pelec'h e teue ar c'hoant treuzkas ar brezhoneg d'ar vugale.

Krog e oan da zeskiñ brezhoneg pa oan 19 vloaz. Un nebeud bloavezhioù goude e oa erru flour a-walc'h ma brezhoneg. Anat e oa din e komzfen brezhoneg da'm bugale ma teufen da vezañ mamm. Mamm e oan deuet da vezañ ha graet em boa anaoudegezh gant kerent vrezhonek all. Lod a gomze brezhoneg d'o bugale ha, souezhusat tra, lod all ne raent ket daoust dezho bezañ gouest da gaozeal brav. D'ar mare-se e oa deuet ur goulenn diazez war ma spered : perak e choaz ar vrezhonegerien komz, pe chom hep komz, brezhoneg d'o bugale ?

Diwezhatoc'h, kustum ma oan da labourat gant brezhonegerien yaouank da-geñver kampoù vakañsoù ha stajoù DABU ha DARE e brezhoneg (BAFA-BAFD), e oan en em c'houlennet meur a wech : penaos e vo gant an dud yaouank emouestlet e treuzkas ar brezhoneg d'ar vugale er c'hampoù vakañsoù ? Ha komz a refont brezhoneg d'o bugale ? Penaos e c'hellan degas un tamm preder dezho war an treuzkas yezh ?

Hep gouzout din e oan kendrec'het abaoe pell gant mennozhioù ar yezhoniour Joshua Fishman¹. Ur yezh vev zo anezhi ur yezh a vez kaset a rumm da rumm er familhoù. Hervezañ e rank an treuzkas naturel-se bezañ pal pennañ stourmerien advuhezekaat ar yezhoù bihan en arvar, ha pa vefe pazennoù all, palioù skañvoc'h, da dizhout a-raok. Er memes koulz e verzen e chome dister plas an treuzkas er familhoù er politikerezhioù-yezh evit ar brezhoneg.²

E-pad bloavezhioù e oa chomet ar goulenn-

noù-se da droiata em fenn betek ma teuas da vezañ sklaer evidon : c'hoant am boa da gompren penaos e c'hoarie treuzkas ar brezhoneg er familhoù hiziv an deiz, gant an tadoù ha mammoù brezhonek yaouank, ha goude-se, marteze, degas preder ha mennozhioù evit ma vefe soursiet muioc'h ouzh an treuzkas er familhoù gant ar politikerezhioù advuhezekaat ar brezhoneg.

Gant testenioù da vemor Master e weler pegen liesseurt eo an doareoù da reiñ buhez d'ar brezhoneg er familhoù. Danvez studiadennoù, teulfilmoù pe istorioù niverus zo aze. Perak e lakaer ken nebeut-se ar gaoz war an dra-se, e-touez ar vrezhonegerien zoken, da'z soñj ?

N'emaon ket a-du ganit. Me 'gav din e vez kaoz muioc'h-mui eus an treuzkas er familh : levr Mikael Madeg e 2011 (*J'élève mon enfant en breton*), abadenn *Bec'h de'i* e 2016, an teulfilmoù *A-vihanig* gant Bleuenn ar Borgn hag *Ar Gwim* gant Soazig Daniellou, enklask KEAV hag Hugues Pentecouteau, stajoù berr KEAV evit ar familhoù, teuliad niv. 408 *Bremañ* e 2016, kendiviz skolveuriek da zont e miz Du en Oriant... Forzhik kaozeadennoù a vez war se er c'houladoù divyezhek 'gav din, etre mignoned brezhonek o deus bugale : *"Penaos 'rez te pa respontont dit e galleg ingal ?"*, *"Diaes eo din komz brezhoneg gante pa welan ne gompren ket an tad, ne fell ket din lakaat anezhañ a-gostez"*, *"Desket 'm eus brezhoneg dre forzh klevet ma gwaz o komz gant ar vugale"*... Kaozeadennoù prevez 'vez dreist-holl.

Pezh zo gwir 'vat eo ne vez ket kaoz eus se kalz gant ar bolitikourien. Meur a abeg zo d'an dra-se : un dachenn brevez eo ar familh da gentañ, n'eo ket kustum ar strollegezhioù foran da vont war an dachenn-se nemet pa vez ar vugale en arvar. Da eil e vank mennozhioù ivez marteze. Petra c'hellfe bezañ evedus evit reiñ c'hoant d'an tadoù ha mammoù da gomz brezhoneg d'o bugale ? Da drede e

vank sifroù. N'eus sifr ebet, pe dost, war an treuzkas er familhoù hiziv an deiz. Pouezus-tre eo ar sifroù evit ar bolitikourien peogwir eo o mod ordinal da vuzuliañ evedusted o oberoù. Erfin eo diazezet ar stourm evit treuzkas ar brezhoneg war ar c'helenn abaoe pell-tre bremañ, gant Diwan, ar c'hlasoù divyezhek, ar c'helenn d'an dud deuet. Ur redi e oa goude ma oa bet dilezet ar brezhoneg gant ar familhoù. Cheñchet eo an traoù bremañ, gant ar rummad nevezvrezhonegerien stummet diwar-bouez an holl strivoù-se, e teu ur mare luzietoc'h, ur mare ma vez dav teurel evezh ouzh diorren ar c'helenn ha dreist-holl ouzh an treuzkas etre rummadoù. Domaj e vefe kenderc'hel da stummañ miliadoù a skolidi, da bostañ forzhik a arc'hant er c'helenn d'an dud deuet, ha merzout e fin ar gont ne fell ket d'ar vrezhonegerien nevez-se implijout ha treuzkas ar yezh d'o zro.

Dre m'eo un dachenn brevez ar vuhez familh e c'hell bezañ kizidik komz en un doare frank diwar-benn se. Penaos e tremen an traoù gant an dud a aterserz ? Ha santout a rez ur strafuilh bennak ?

Fentus eo peogwir eo perzh kizidik an afer-se en deus broudet ac'hanon da studiañ an treuzkas er skol-veur. Aes e oa din komz eus implij ar brezhoneg er familh gant mignoned o doa graet ar choaz desevel o bugale e brezhoneg evel don. Met ne greden ket lakaat ar gaoz war se gant mignoned all o doa graet ar choaz kontrol. Ur seurt tabou a oa. Aon 'm boa en em santfe "barnet" ar vignoned-se.

Gwiskañ chupenn an enklaskerezh zo bet burzhodus evit se : deuet on a-benn da sevel ar goulennoù 'm boa c'hoant ha ne 'm eus santet strafuilh ebet pa oan o tastum testenioù an dud. A-raok mont da atersañ an dud 'vat em eus ranket dilezel da vat ma chupenn stourmerez, da lâret eo cheñch tro-spered : lezel a-gostez ar soñj kendrec'hiñ pe broudañ an dud d'ober giz-se pe giz-mañ, met selaou



© Katell Chantreau

Piv eo ar vrezhonegerien ha brezhonegerezed a ziviz komz ho yezh pe get ouzh o bugale ? Dastum peadra da sevel un tamm respont d'ar goulenn-se e fell da g-Katell Chantreau ober.

anezho hepken, aketus-tre, dastum teñzor o skiant-prenet hag o sell war ar vuhez ha war ar bed. Awenet-bras on bet gant alioù ar sokioologour Jean-Claude Kaufmann war an *entretien compréhensif*, teknikoù evit bezañ aketus da vat, gant empatiezh ha gant fent. Sot on gant an atersadennoù : atersañ un den zo 'giz ober anaoudegezh gant ur blanedenn. Ur sapre prof a vez graet din bep tro gant an dud a asant digeriñ dorioù o bed dezho.

Peseurt splet a fellfe dit e c'hellfe an dud tennañ eus da labour ?

Pa oan o tougen ma bugel kentañ 'm eus soñj bezañ bet lennet un toullad testenioù diwar-benn ar gwilioudiñ, ar sevel bugale. Savet 'm eus ma hent din-me tamm-ha-tamm, awenet gant lod pe hegaset gant lod all, gant ar pezh e oan-me. Evit treuzkas ar brezhoneg eo ar memes tra. N'eus lezenn ebet (*"Un den, ur yezh"*, *"Arabat rediañ ar vugale da gomz brezhoneg"*...). Ouzhpenn ur mod d'ober a zo. Da bep hini da gavout e hini, hervez e istor, e youl, e sell war ar bed, e bersonelezh, personelezh e vugale... Testenioù ar re all a c'hell reiñ mennozhioù evit sevel e damm preder war se. Ar stourmerez kuzhet a-dreñv an enklaskerezh a vo diaes dezhi chom hep rannañ grik 'vat : ar vrezhonegerien a fell dezho 'vefe un dazont d'ar brezhoneg a rank hejañ o ijin evit kavout doareoù da reiñ plas d'ar brezhoneg en o familh, bras pe

bihan, tener pe c'hwek, met ur plas brav forzh penaos. Evit abegoù sevenadurel hag evit abegoù politikel. Da'm soñj eo pouezus-tre e vefe emren ar vrezhonegerien ar muiañ ar gwellañ evit treuzkas o yezh. N'eo ket dibosupl e teufe stroladoù politikel a-enep krenn d'ar yezhoù minorel e penn ar Stad c'hall pe e penn Rannvro Breizh, ha digresket gante (pe diverket zoken) al linnennoù budjed evit ar brezhoneg. Petra a rafemp ma vefe divizet gant ar Stad c'hall paouez da baeañ skolaerien Diwan pe paouez da duta mistri-skol divyezhek ? Petra a rafemp ma vije rannet dre zaou budjed ar brezhoneg er Rannvro ? Manifestiñ evel-just ! Daoust ha trawalc'h e vo evit cheñch penn d'ar vazh ? Ma vez kreñv an treuzkas er familhoù e vo start an traoù-se met ne vimp ket diskaret gante.

E-keñver politikerezh yezh em eus spi e c'hellin sevel un nebeud kinnigoù evit ar Rannvro hag ar c'huzulioù-departamant evit pinvidikaat o steuñvoù diorren ar brezhoneg. "D'ho soñj, petra a c'hellfe aesaat implij ar brezhoneg er familhoù gant an tadoù ha mammoù brezhonek ?" Sed aze ur goulenn a zo e fin ma goulennaoueg enlinenn. Ur bern mennozhioù zo bet kinniget gant an tadoù hag ar mammoù dija. Dav 'vo din ober ar sintezenn ha liammañ anezho gant al labour dielfennañ ar strategiezhioù treuzkas.

Respontoù dastumet gant M.L.

Kendiviz en Oriant

Un devezh-studi a vo kaset en Oriant, d'an 23 ha 24 a viz Du 2018, diwar-benn *"Brezhoneg, yezhoù minorelaet : amzer-dazont ha treuzkas familh"*, kenaozet gant Kuzul Sevenadurel Breizh ha Skol-veur Kreisteiz Breizh.

Skrid memor Master Katell Chantreau a gaver da bellgargañ en he lec'hienn, e stumm PDF. Evit gouzout hiroc'h ha respont da c'houlennaoueg Katell Chantreau : www.treuzkas.net

1. Joshua Fishman (1936-2015) a oa ur yezhoniour stadunanat. Labourer en deus war tachennoù ar sokioyezhoñiezh, ar steuviñ yezhel, ar politikerezhioù yezh, an deskadurezh divyezhek... (mammenn : Wikipedia).

2. Da skouer : An danevell *Ur politikerezh yezh evit Breizh* a oa bet votet e 2012 gant Rannvro Breizh. Teir lodenn a ya d'ober ar rann war politikerezh diorren yezhoù Breizh : 28 pajenn gouestlet d'an treuzkas, 16 da ziorren plas yezhoù Breizh er vuhez sokial, sevenadurel ha foran ha 5 da ziorren plas yezhoù Breizh en ensavadur-rannvro. E-touez an 28 pajenn gouestlet d'an treuzkas, 18 a bled gant an treuzkas er skol, 8 gant an treuzkas d'an oadourien, ur bajennad hanter gant degemer ar vugaligoù e brezhoneg hag un hanter-bajennad gant an treuzkas er familhoù (notenn gant Katell Chantreau).